

— 7 —

KANAOUEN AN DURZUNEL

Kalz amzer a meuz kollet
O furchal er c'hoajou,
« Vit tapout eun durzunel
Kousket var ar brankou
Devet emeuz ma amors,
Ha tennet a meuz fall,
Achapet an durzunel
Ha nijet er c'hoat all. (bis)

Diouz an noz hag ar mitin,
Me glev al lapousset,
O kana, o fredonin,
Da vek ar gwez pignet,
Na meuz niken anezo
Hag a bik ma c'halon,
Evel mouez eun durzunel
O welan d'he mignon.

Hirvoud a ran noz ha de
Gant ar boan ha glac'har,
Evel eun intanvez paour
Kollet ganti e far,
Ma neuz nikun anezo
Hag a bik ma c'halon,
Evel mouez eun durzunel
O welan d'he mignon.

— 8 —

Petra durzunel yaouank,
A dourmant da c'halon ?
« Kollet a meus, emezi,
Ma fidellan mignon.
Ma na zeu eur chasseour
Da ober d'in mervel !
Me varvo gant ar glac'har
Da va Mignon fidel.

Gwelet a meuz o vervel
An durzunel yaouank
Dizec'het oa ma c'halon
Gant ar boan an tourmant
Enn deus c'hoaz repetet
« Ha ma mignon fidel
Mont a ran da vervel »
Raktal eo tremenet.

